

**Levrig-anavezout liorz-h-iliz Sant-Tomaz
Landerne**

Anv :

Anv bihan :

Klas :



Geriaoueg

Liorzh-iliz : lec'h relijiel, kloz gant ur voger-dro, ma kaver ennañ ur volz-enor, ur garnel, ur c'halvar, un iliz hag ur vered tro-dro dezhi.

Parrez : rann velestradurel diazez an Iliz.

Kalvar : skeudennadur pasion Jezuz-Krist war ar groaz gant tudennoù all tro-dro dezhañ.

Karnel : savadur a vez miret ennañ relegoù ar re varv.

Porched : pezh mañsonerezh balirek en-dro da zor-dal un iliz.

Sakristiri : adti stag ouzh an iliz ma virer listri-liderezh hag an dilhad ennañ.

Stern-aoter : framm livet ha kinklet puilh lakaet sonn a-dreñv d'un aoter.

Nev : rann greiz an iliz etre an tour hag ar chantele.

Doue an Tad : krouer an hollved evit ar gristenien.

Jezuz : den istorel hag a veve 2000 vloaz 'zo e Palestina. Azeulet e vez gant ar gristenien evel Mab Doue. Anvet e vez **Krist** ivez.

Aviel : pep hini eus levrioù ar Bibl m'eo displeget buhez ha kelennadurezh Jezuz-Krist.

Abostol : unan eus an daouzek Diskibl kentañ bet dibabet gant Jezuz Krist evit prezeg an Aviel ha kenderc'hel e gelennadurezh war e lec'h.

Eskopti : tiriad dindan aotrouniezh un eskob, heñvel ouzh un departamant. Emañ an **eskob** e penn un eskopti. E Penn-ar-bed emañ o chom e Kemper.

Merzher : den boureviet pe lazhet en abeg d'e vennozhioù politikel pe relijiel.

Badeziant : kentañ sakramant, a roer en Iliz Katolik, a laka un den da vezañ kristen.

Chapel-vadeziñ : chapel ma vez badezet an dud er font-badeziñ.

Piñsin (dour benniget) : endalc'her a dalvez da lakaat dour benniget.

Sablezenn : treust prenn kizellet mistr hag a dalv da harpañ framm an doenn.



An istor e berr-gomzoù

E fin ar grennamzer hag en amzer a-vremañ (1450-1750) e oa Breizh, bet gwechall dugelezh dizalc'h hag, adalek 1532, ur broviñs c'hall, unan eus ar rannvroioù pinvidikañ en Europa a-drugarez d'ar greanterezh ha da genwerzh al lienoù lin. Ar beizanted, an artizaned hag ar varc'hadourien, deuet da vezañ pinvidik ha bleinet gant ur feiz don ha birvidik, a fellas dezho gouestlañ ul lodenn eus o finvidigezh da sevel oberennoù arz... Liammet ouzh ar prantad-se eo donedigezh ha diorren al liorzhoù-iliz er vro. Er vro e c'heller kontañ un tri-ugent bennak a liorzhoù-iliz bet savet tamm-ha-tamm, un ugent bennak anezho o vezañ e traoñienn an Elorn.

Eus porzh Landerne e veze ezporzhiet al lienoù lin ; div liorzhoù-iliz edo e Landerne d'ar mare-se.

Hini Sant-Houardon edo war ribl dehou an Elorn, kostez Bro-Leon, nepell diouzh ar stêr el lec'h m'emañ skol Sant-Julian hiziv an deiz. En XIX^{vet} kantved e voe dilec'hiet ul lodenn eus an iliz kozh - tour-iliz ha porched su (1604) - hag adsavet un iliz nevez ha brasoc'h e kreiz-kêr.

Hini Sant-Tomaz, gouestlet da D/Tomaz Becket, anezhañ arc'heskob Cantorbéry (Bro-Saoz) drouklazhet e 1170, a zo bet savet war ribl kleiz an Elorn, da lavaret eo, e Bro-Gerne. Eno e vez meneget roud eus un iliz ken abred hag ar bloaz 1218. An iliz a-vremañ a zo bet savet etre ar XVI^{vet} hag ar XVII^{vet} kantved.

Un nebeud bloavezhioù a c'heller lenn engravet er mein

En diavaez :

1607 : d'ar mare-se edo rouantelezh Frañs dindan ren Herri IV. Gantañ e oa bet lakaet termen d'ar brezelioù etre ar gatoliked hag ar brotestanted.

1635 : emaomp dindan ren Loeiz XIII.

1669 : emaomp dindan ren Loeiz XIV, ar Roue Heol (1638-1715).

En diabarzh e kaver ur bloaziad all :

1711...

Colbert, ministr Loeiz XIV, a felle dezhañ diorren greanterezh al lienoù e Bro-C'hall. En abeg da-se e lakaas harz d'an ezporzhiadurioù al lien. Diwar neuze e ehanas Bro-Saoz da bremañ marc'hadourezh digant Breizh. Kement-se a verkas dibenn an « oadvezh aour Breizh » ha war un dro hini al liorzhoù-iliz er vro.

- 1 bolz-enor / moger-dro
- 2 Kalvar / Bered
- 3 Karnel
- 4 Porched
- 5 Iliz



Peseurt elfennoù a vank e Sant-Tomaz ?

.....

.....

.....


Perak eo diglok liorz-h-iliz Landerne?

.....

.....

.....

An tour-iliz



6 -

5 -

4 -

3 -

2 -

1 -

1 - Gant peseurt elfenn arkitektouriezh da heul ez a pep niverenn ?
- tour - porched - garidoù - kambr ar c'hleier - bolz-toenn - gargoulioù


2 - Pevare eo bet savet an tour-iliz ?

3 - Daoust hag anavezout a rit stummoù all disheñvel diouzh hennezh ?

.....
.....

4 - Sellit a-dost ouzh an tri c'hustod, pep a gresk-loar a-us dezho, o c'houdoriñ an delwennoù. Daoust ha « kresk-loar Landerne » eo ?

Ar Garnel



1 - Da betra e servije ar savadur bihan-se, (an ti bihan-se) ?

.....

.....

.....

2 - Pevare eo bet savet ?

3 - Pet vloaz goude an tour-iliz ?

4 - Peseurt liv eo ar mein ?

1 - Eztennet e veze ar mein eus ur gêriadenn lec'hiet e morlenn Brest ha kaset war vag da borzh Landerne.

Daoust ha gouzout a rit peseurt kêriadenn eo ?

2 - Delwennoù an tour-iliz zo kizellet gant mein disheñvel o liv hag o greunenn diouzh re ar garnel.

Daoust ha gouzout a rit peseurt mein int ?

An aoter hag he stern-aoter

An aoter a zo un daol hag a servij da lidañ pred diwezhañ Jezuz gant e ebestel. (koan-Fask / koan-diwezhañ).

Peurliesañ e kaver ouzhpenn un aoter en un iliz.

Pet aoter zo en iliz Sant-Tomaz ?

Ar stern-aoter zo un daol livet ha kinklet puilh lakaet sonn a-dreñv d'un aoter. Delwennoù a gaver peurliesañ tro-dro dezhañ.



1- Peseurt bloaziad a c'heller lenn war ar stern-aoter-mañ ?

2- Piv zo war-nes bezañ drouklazhet ?

3- Piv eo an dud a gemer perzh en drouklazh ?

4- Peseurt titl a c'hellfec'h reiñ d'an arvest-se ?



1 - Piv zo war-nes bezañ drouklazhet ?

2 - Dirak peseurt lodenn eus an iliz ?

3 - Peseurt titl a c'hellfec'h reiñ d'an arvest-se ?



1 - Petra 'vez graet eus an arvest-se en Avieloù ?

2 - Pet kouviad a zo ? Piv int ?

3 - Unan anezho a seblant bezañ o treiñ kein d'ar re all. Perak 'ta ? Ha piv eo ?

4 - Petra 'vez graet eus ar gwaregoù en adreñv ?



1 - Petra 'vez graet eus an arvest-se en Avieloù ?

2- Daoust hag anavezout a rit unan bennak hag a oa skeudennet en arvest a-us ?

3 - Piv eo an den daoulinet ? Petra emañ oc'h ober ?

4 - Penaos en deus roet an arzour ur santadur a zonder d'an arvest-se ?

An delwennoù



Un niver bras a zelwennoù kozh a gaver e Sant-Tomaz. Un doare kaer e oa da ginklañ al lec'h e-ser kelenn kemen-nadurioù an Iliz d'ar fideled.

Ar Werc'hez en he gourvez



1) Gant peseurt danvez eo bet graet delwenn ar Werc'hez ?

Koad, plastr, mein ?

2) Div elfenn zo aet da goll. Pere ?

En he divrec'h :

E-harz he zreid :

Santez Anna o tougen ar Werc'hez hag ar Bugel



1) Pet tudenn a zo ?

2) Piv int ?

• An hini vrasañ ?

• An hini etre an div all ?

• An hini vihanañ ?

3) Penaos eo bet lakaet war wel rummadoù-oad an tudennoù ?



Sant-Nikolaz

1 - Petra zo skeudennet e-harz treid sant Nikolaz ?

2 - Sant Nikolaz eo, e meur a vro, a zegas ar c'hoarioù e-pad :

E-lec'h an :



Sant-Erwan



Sant-Jorj

1 - Sant patron piv eo Sant Erwan ?

2 - Petra emañ o tec'hel en e zorn kleiz ?

3 - Petra zo war e benn ?

1 - Sant patron Bro-Saoz eo Sant Jorj ha dediet eo an iliz da Sant Tomaz, an arc'heskob Saoz.

2 - Peseurt loen a zo e-harz e dreid ?

3 - Petra emañ oc'h ober ?

Ar Sablezennoù

Ar sablezennoù a zo treustoù koad-derv, lakaet war-lein ar mogerioù, a dalvez da skorañ framm an doenn.

Deus pelec'h e teu o anv ?

Kinklet e oant gant kizellerien ha livourien ampart a veze lezet frankiz dezho, dezho da vont pep hini da-heul e awen hag e faltazi.

1 - An arvest dudius a stil eeun



Diskrivit an arvest :

.....

.....

.....


.....

.....

.....

.....


Livit an dresadenn






2 - Ar sablezennoù all a zo kinklet gant tresadennoù giz an Azginivelezh, maskloù ha « lêroù », fichet peurliesañ gant garlantezennoù, bleunioù ha frouezhennoù.

Leugnit ar skeudennoù da heul ma'z oc'h gouest da zisheñvelaat ur maskl diouzh ul « lêr » !



Landerne er XIV^{vet} kantved (1336)

Tres savet gant an istorour Jean Kerhervé




Landerne en XIX^{vet} kantved



Marc'had an avaloù - 1876-1877- taolennet gant Leon Lhermitte.



Landerne - Karnel Sant-Kadou, deuet da vezañ ti-annez.



Savet eo bet al levrig-se gant an APEVE (Ur gevredigezh a zo he fal brudañ liorzhoù-iliz traoñienn an Elorn).

Skridaozadur : Michel Hamon, Anne-Marie Prigent, Christiane Quentric.

Luc'hskeudennoù : Jean-François Chauchard, Michel Hamon, Jean Przygoda, René Tréguer

Brezhoneg : Yann ar C'horr

